

5

Henoriou væn ha triomphou.  
 Adieu d'an traou deus an douar,  
 Adieu d'an Ee ha d'e c'hloar.  
 Mallos d'ar vam, mallos d'an tad  
 A zo bet ouzin quen ingrat  
 M'odeus gred din col ma ene  
 D'am bea lesset em liberte.  
 E zan da veza interret  
 En Ifern gant an dut daounet,  
 Da lesqui ebars er flamou  
 Da james gant an diaoulou.  
 A possubl e ve, ô va Doue,  
 A serrac'h ouzimp dor an Eê;  
 Obtenit dimp, ô va falver,  
 Eur plaç en ho cloar etenel.

Amen.



## CHANSON NEVEZ

*Var sujet ar goal Teodou.*

**T**Ostaet oll, tud yaouanc, tostaet da gle-  
 vet  
 Ur hiniat leun a c'hlac'har hac a daëro beu-  
 zet,  
**V**oar sujet daou zen yaouanc en em gare  
 parfet,

## 6

Ya, gant fidelite, evel ma voa dleet.

An daou den-mâ a voa daou den en em  
gare parfet,

Ya gant fidelite, evel ma oa dleet;

Achu eo an amitie a so bet entreze,

Ar goal teodou milliguet a so quiriec deze.

Rac-se eta, tud yaouanc; glefot teodou  
fal

O tonet da drouc-prezet, deut pront d'o  
chasseal;

N'en deus netra sanfiploc'h evit n'en d'eo  
hoc'h enor,

Hac a so dac'h utiloc'h evit n'en deo mil  
densor.

Ya, m'en assur dac'h, hac en assur erfat,  
M'en dalvezo d'ar goal teod abret pe zive-  
zat,

Laret en deus ac'hanon traou ha n'en d'int  
quet guir,

Hac empêche ac'hanon da gafet ma desir.

Mæs me fio e Doue a so ur Barner mat,

A bunisso ar goal teod abret pe zivezat:

Laret eo d'ar goal teod partout dre ar vro-  
mân,

Nep a scoio gant ar c'hleze a berisso gantân.

M'em boa choaset ur Vestres, ar vravan  
feumeulen,

Hep laret droug a hini, a varche e pep tachen,

Hac a songe gueneme e voa din-me fidel

Caus eo bet ar goal teodou da drubuil d'am

Mestres.

## 7

**Abars un neubeut goude ha me clevet ar  
brut**

**Petra en devoa laret ar goal teodou d'e zut,  
Ha me diguemen ma Mestres en un tu a  
goste ,**

**Eleac'h ma voamp-ni custum da gonta hon  
doare.**

**Pa er guelis o tonet , me voa bras suprenet ,  
O tont da gonsideri penaus e voa changet ;  
Troublet e voa ma speret ha ma intenta-  
mant ,**

**Ha privei eus ar parlant neuse souden va-  
tant.**

**Ha ni commanç da vowel dre ur guir ga-  
rante ,**

**Hep gallout lavaret guer an eil ouz eguile ;  
Me ho les da gonsideri da peguement a  
c'hlac'har**

**Eo caus dimp ar goal teodou dimp-ni var  
an douar,**

**Pa illin mont da barlant , ha me goulen  
outhi :**

**Leveret din , ma Mestres , pere eo hoc'h  
anvi ;**

**Ma ouffen e ven quiriec , ma Mestres d'ho  
clac'har ,**

**Me garre bout interret e calon an douar.**

**Eleal , ma Servicher , c'hui n'en doc'h  
quet quiriec ,**

**N'en deo an teodou milliguet en deus hon  
glac'haret ,**

## 8

Nonobstant quemense me ho caro bepret ;  
 Ma n'am be quet ac'hanoc'h , biquen na  
 vin dimeet.

Adieu eta , va Mestres , quen a vo ar  
 c'hentâñ ;

Me am bo sonch ar c'homisou a laret din  
 bremàn ;

Ha pa ven lequet da choas etouez an oll  
 merc'het ,

Me am bo sonch ac'hanoc'h , ma c'harante  
 parfet.

Ar Son - mâ so composet certen hac a so  
 guir ,

A so groet d'un den yaouanc n'ell quet  
 caout e desir ,

M'en devo sonch e Vestres , pa glevo e  
 c'hanan.

Desquit-hi , oll tud yaouanc , d'en em di-  
 versifian.

*F I N.*